

CHOMIT E BREIZ




D'an hanv ne - vez, pa vez gue - let Ar bleunv er guez,



O Breiz I - zel, va bro ga - ret, Na brao oud - te!



An heol a splan, lu - ger - nus kaer, Var ar mea - ziou,



A gleiz hag a ziou ne ve - ler 'Met bo - ke - jou.

I

D'an hanv nevez pa vez guelet
Ar bleunv er guez,
O Breiz izel, va bro garet,
Na brao oud-te !
An heol o splann lugernus kaer
Var ar meaziou
A' gleiz hag a ziou ne veler
Met bokejou.

II

Du-hont, du-man ar pichoned
Er bodou kloar
A gan bemdez d'ar Vretoned,
Hag a lavar :
Bugale Breiz, eurus oc'h-c'hui
Eurus meurbet ;
Eur vro ker kaer hag hoc'h hini
Na gaver ket.

III

Lavaromp ta gant an evned
A vouez uhel :
Nann, n'ez eus er bed bro ebet
'Vel Breiz-izel.
Rakse, Breiziz, na zonzomp ket
Monet e ker,
Mes chomomp da veva hepred
En hor bro gaer.

IV

Perak, o Breiziz, mont e ker ?
Larit d'in-me,
Ha c'hui a gred e berr amzer
Kavout danvez ?
Arc'hant e ker ne vez kavet :
Kentoc'h, allas !
E leac'h dañvez hag eurusted,
Dienez vras,

V

Pegement a dud faziet
Pell diouz o bro
Araog eur bloaz o deus sonjet
Donet en dro !
En dro d'al lannou boketek,
D'ar prajou glas,
Eleac'h ma vever kalonek,
Bihan ha bras.

VI

E Breiz Izel var ar meaziou
Eo brao beva.
Sellit : Breiziz en o farkou
A gav o joa.
Tomder an heol e kreiz an hanv
A sko dalc'hmad
Breiziz ato joaius a gan
O labourat.

VII

Epad ar goanv en tiegeziou
En dro d'en tan,
Breiziz a lavar soñnennou
Evel en hanv.
Bras ha bihan, koz ha iaouank,
Emaint bodet
Lod er gador, lod var ar bank
Holl azezet.

VIII

Mamm goz en eur c'horn tro chouchet
Gant he mantel,
A lavar : « Bugale, chomet
E Breiz Izel.
Chomet en ho pro da veva
'Vel ho tadou ;
Eveldo kemerit ho joa
En ho parkou. »

IX

Eus ho komzou mil drugarez,
Mamm-goz karet !
'Vel hon tud koz ni holl ivez
Zo Bretoned
Mad da labourat hon douar,
Douar hor bro ;
Da c'hedal en Nenv hep arvar,
Pa zeui hon tro!